

# FEIZ HA BREIZ

*Seneg-nas*



X DE LANGLAIS

GWENGOLO 1935

# Feiz ha Breiz

Kelaouenn viziek gant skeudennou  
Renet gant an Aotrou PERROT

Koumananchou diouz ar bloaz :	Embannou d'ouz ar bloaz :
Breiz . . . . . 13 lur	1/4 pajenn 150 lur
Frans ha broioù stag outi . 15 lur	1/2 pajenn 275 lur
Evid ar e zo re diavez bro . 20 lur	3/4 pajenn 300 lur
	1 pajenn 500 lur

Pa gemerer da nebeuta pemp Feiz ha Breiz diouz ar bloaz, pep niverenn a deu da 10 lur hepken

## Taolit evez :

Evit ma vezo esoc'h eüna pep tra, da **Serignac hepken** eo e tleer kas, hiviziken, kement tra a zeil ouz **Feiz ha Breiz** : skridoù, embannoù, koumananchou ha paeamanchoù.

**Kemennadurez d'hor c'houmananterien.** - War golo an daouzekvet **Feiz ha Breiz** a en em gavo gant hor c'houmananterien, o fedimp, da baea, o unan, o c'houmanant raktal, da : *M. le Directeur de FEIZ HA BREIZ, Serignac* (Finistère), C. C. 21 802 Rennes, ha neuze n'o devozo nemed 15 gwenneg vizou evit degas o arc'hant, e lec'h eur skoed, ma rankfemp karga ar post da vont d'her goulenn beteg an ti.

Pemzek deiz goude ar gemennadurez-ze, ma ne vez deuet netra d'omp, e kasimp eur baperenn all d'hol lennerien d'o fedi da baea kenta ma c'hellint. Ne gargimp ket ken ar post da vont da c'houlenn arc'hant ar c'houmananchou beteg an ti, rak re vizus eo evit hol lennerien.

## TAOLENN AR MIZ

Ar Bleun-Brug ho ped . . . . .	245
XXV <sup>me</sup> Gouel ar Bleun-Brug . . . . .	250
Labour « Breuriez ar Brezoneg » er skolioù epad ar bloavez 1934-1935 . . . . .	258
Ar peurzorn . . . . .	263
Ar Vamm . . . . .	265
Dalc'homp d'hor gwiskañant . . . . .	274
Deleier ar miz . . . . .	276
Divinadennoù Eost ha Gwengolo . . . . .	280

# FEIZ HA BREIZ



D'AN 1, 2 ha 3 a viz gwengolo ema gouelioù bras ar « Bleun-Brug » e Pleyben hag, en dervez warlerc'h, e raimp e Landevennec, e iliz koz an abati, gouel ar Milvet bloaz abaoe ma tistroas di ar venec'h goude ma oa bet dismantret Breiz gant an Normaned ; eur zizun vras evel ma n'eus ket bet hini all ebet ken kaer, pell a zo, e vezo eta, evit Breiz, sizun genta miz gwengolo.

Evid ar pempet gwech war nugen ar « Bleun-Brug » a bed an holl Vretoned d'en em voda en e c'houelioù keltiek, kaera re a vez graet, bep bloaz, e Breiz-Izel, en enor d'ar Vro, d'he zud brudet ha d'he brezoneg.

Ar « Bleun-Brug » a vleunias, evid ar wech kenta, d'an 12 a viz gwengolo 1905, breman ez eus tregont vloaz, etre mogerioù gwaskeedet mat kastell koz Keryann, e Gorre-Leon, edo o chom ennan neuze an A. hag an I. Charlez a Goatgoureden. An A. Albert de Mun, a voe baeron, Mari-Anna Abgrall, e vaeronez, hag an A. Gaston a Ger-venguy, e rener kenta.

Breuriezoù all a oa en e raok, hag a labour e ivez evit Breiz, met o renerien, ma oant Bretoned a galon, — hag e oant, — ne oant ket Bretoned a yez ha setu perak eo bet savet ar Bleun-Brug, evit beza breuriez ar Vretoned penn-kil-ha-troad, a gomz o yez, a anavez istor o bro hag

a venn ober kement tra a zo en o galloud evit lakat an traou, en dro d'ezo, da vont war weil.

Ger ar re a deu er Bleun-Brug eo : Feiz ha Breiz, pe henman c'hoaz : Hep brezoneg, n'eus Breiz ebet !

Breman ez eus mil bloaz hor bro a oa e kany; he gwella bugale a oa tec'het pell diouz douar o c'havell; an Normaned a rae o mistri dre holl; en eun taol, eur manac'h, sklerijennet hag harpet gand an Aotrou Doue, Yann Landevennec, a zistroas d'e abati koz, devet ha diskaret; e lec'h chom da ouela, war draou pulluc'het, e vodas en dro d'ezan eun nebeud gwazed speredok ha kalonek, e c'halvas pennadureziou ar Vretoned hariuet e Breiz-Veur da zistrei hag en eur ober pevar pe bemp bloaz, ar vro a-bez eus an eil penn d'egle, a oa troet war an tu mat.

Pebez kentel eo ar gentel a ro d'eomp Yann Landevennec ha pebez ezomm hon eus da denna talvoudegez anezi; AR VRO en deus bet kement a boan ouz he adsevel A ZO DISKARET, adarre, siouaz, ar pezh ma c'hell beza, — EN HE FEIZ, — nag a dud en dro d'eomp o deus mez o tiskouez ez int kristenien hag a labour en dra ma c'hellont, da vouga ar feiz kristen, en dro d'ezo, — HAG EN HE BREZONEG, — nag a dud hag o deus mez o tiskouez ez int Bretoned hag a labour, en dra c'hellont, ivez, da vouga ar brezoneg e genou ar vugale vihan.

Goueliou Pleyben a dle beza goueliou a sklerijenn, goueliou hag a lakay eleiz a Vretoned da welet pegement a ezomm o deus da labourat evid o bro, diskaret dre labour milliget gwas e nebourien he deus bet biskoaz hag eo he bugale nac'het ganto o mamm !

An tiegeziou a en em zav pa gar an hoil en em glevet; evid ar broiou eo henvel; tra an holl, ar vro a dle beza adsavet gant skoazell an holl.

Piou ne c'hell ket ober eun dra bennak evit diarbenn an dud dizoue ha divrezonek ha miret outo da ober kement a zroug hag a reont ?

Piou ne c'hell ket diskouez e feiz, a-wel d'an holl, dreist-holl pa zigouez deiz bras ar zul ?

Piou ne c'hell ket poueza war ar re ma ro e vouez d'ezo, da vont er c'hargou, evit ma taolo ar C'houarnamant, d'an traon, an holl lezennou dizoue, traou donjerus ha ne dlefant beza gouzanvet e nep lec'h ?

Piou ne c'hell ket poueza war guzulierien e barrez evit ma raint ar pezh a zo en o galloud evit ma vezo digoret, hep dale, doriou holl skoliou ar C'houarnamant d'ar brezoneg ?

Piou ne c'hell ket poueza war mammoù a oar brezoneg hag a zo diskiant a-walc'h evit chom hep hen deski d'o bugale ?

Piou ne c'hell ket poueza war vistri ha mestrezed ar skoliou kristen, war veleien ar c'hatekiz, war renerien ar patronachou, evit ma troint ar vugale a zo fiziet enno war yez, kantikou, soniou hag istor ar vro ?

Amzer da zont hor Breiz a zo etre o daouarn p'eo gwir ema ganto ar vugale !

Piou ne c'hell ket harpa, a-zoare, ar skrivagnerien vrezonek ha goude ma ne vefe nemed o prena o skridou ?

Ha n'eo n'eo ket eun druez, a gav d'eoec'h, gwelet ar Vretoned o rei kement a vilionou, bep bloaz, da harpa ar skrivagnerien c'hallek hag o lezel o re o-unan da vervel gand an naoun ?

Tud a zo hag a zo touellet, re en holl, gand ar galleg : ar galleg ? Mat eo her gouzout; den n'hen nac'h, ha talvoudus e vije bet zoken deski saozneg, e skoliou Breiz-Izel, muic'h eget n'her graer, kement all a zarempred a zo bet hag a zo atao etre ar Vretoned hag ar Zaozon; ar muia yezou a oar eun den eo ar gwella.

Met e Breiz, ar galleg ma 'z eo mat evel mevel a zo fall, evel mestr.

Ar brezoneg eo yez ar Vretoned, evel m'eo ar galleg yez ar C'hallaoued hag ar saozneg yez ar Zaozon.

Ar renk a enor e Breiz a dle eta beza d'ezan : red eo da bep yez chom en he renk evel da bep den chom en e hini.

Ar Vretoned, ken etrezo, a dle atao mont e brezoneg hag ar re anezo ne ouezont nag e skriva nag e lenn, ne c'heller ket lavaret e vefent tud desket daoust pegement a draou a c'heilfent beza sanailhet en o spered, pa ne ouezont ket ar pezh o deus muia ezomm gouzout.


\*\*

Rak-se 'ta, n'eo ket labour eo a vank; an dachen a zo da drei war an tu mat a zo frank; kement hini her gwel a zo pec'hed d'ezan chom da gousket; dihunomb.

D'eomp-ni, Bretoned an XX<sup>vet</sup> kantved eo digeri hon daoulagad da ober, holl a-unan, ar pezh en deus graet Yann Landevennec, gant Bretoned an X<sup>vet</sup> kantved, da lavaret eo adsevel eur wech c'hoaz hor bro en he renk, en he splander, en he finvidigez hag en he santelezh.

Doue ra viro Breiz, da virviken !

Y.-V. PERROT.




**An Ao. DUPARC**

*eskob Kemper ha Leon,*  
a reno goueliou Bleun-Brug Pleyben.

## XXV<sup>et</sup> Gouel ar Bleun - Brug

**D'an 1, 2, 3 ha 4 a viz gwengolo a zeu e PLEYBEN**

TREDE DERVEZ AR GOUELIOU A VEZO RENEZ gant an *AOTROU DUPARC*, Eskob Kemper ha Leon ha gant an *AOTROU MESGUEN*, Eskob Poitiers.



### D'AR ZUL 1 A VIZ GWENGOLO

Da 9 eur 30, e vezo digoret *Sal an Ti-kêr*, el lec'h ma tiskouezo « *An Droellen* » (Atelier breton d'Art chrétien), an traou-iliz hag an traou breizek ha kel-tiek kaera a oufed gwelet (Exposition d'Art sacré).

Da 10 eur, Oferenn-bred ; prezegenn war ar Bleun-Brug : *Feiz ha Breiz*.

Da 14 eur, ouz son an trompilhou, ar vombard hag ar biniou, e kreiz ar c'han hag ar meuleudiou, e vezo digemeret brudeta mab Pleyben a wiskas dilhad, an *Aotrou Mauris Tresiguidy hag e dud*, o tizrei eus Emgann an Tregont : kaera taolenn evit lakât ar bobl da anaout tud vat an amzer dremenet.

Da 14 eur hanter, gousperou war doniou bras ar pardonioù.

**Raktal goude ar gousperou :**

E park ar Patronach, GOUEL BREZONEK : *Gourinadegou*, - *Korollou*, - *Kanaouennou*, gand Gourinerien, Korollerien ha Kanerien ar *Bleun-Brug*.

Evit digeri ar c'hoariadeg, kanerien Pleyben a gano : *Bleuniou Breiz*.

Kanerien Kembre, an Aotronez John Evans Morris, Vincent hag Ewart Pate, eus Caerdydd a gano : *Rhyfelgyrc'h Capten Morgan*, da lavaret eo kan brezel ar c'habiten Morgan.



**AN AO. MESGUEN**  
*eskob Poitiers,*

a brezego e Bleun-Brug Pleyben.

Goude krogad kenta ar c'hourinerien hag a-raok staga d'an eil e kanint *Clychau Aberdyfi* (Kleier Aberdyfi).

Endra ma raio tro ar park ar gouriner e vezo aet ar maout gantan e kanint *Rhyfelgyrch Gwyr Harlech* (Kan brezel gwazed Harlec'h).

Daou Vreizad o chom e Paris, Job ar Guennegan ha Robert Raucon a gano ivez soniou brezonek evel *Ar Biniou*, *ar Mesaer*, *ar Skubell*.

**Da 20 eur :** E Sal ar Patronach, BEILHADEG VREZONNEK.

- 1) Eur ger war *Bleyben*, gand an Ao. Guilly, noter.
- 2) *Salud Breiziz*, gand Kanerien Pleyben.
- 3) AN DEVER DA GARET, pezh en eun arvest, gand c'hoarierien ar Bleun-Brug, renet gand an Ao. de Dieuleveult.
- 4) *An Eosterien*, kanet gand kanerien Pleyben.
- 5) *Ar wreg nec'het*, kanet gand kanerien Pleyben.
- 6) AN TREN MARC'HAD MAT, pezh farsus en eun arvest, gand c'hoarierien Pleyben, renet gand an A. Page.
- 7) *Mor-Vran*, kanet gand kanerien Pleyben.
- 8) *Serr-Notz*, kanet gand kanerien Pleyben.
- 9) AR MELEN HAG AR GWENN, pezh farsus en eun arvest, gand c'hoarierien ar Bleun-Brug, renet gand an Ao. de Dieuleveult.
- 10) Da gloza : BRO GOZ MA ZADOU.

#### D'AL LUN 2 A VIZ GWENGOLO

Dervez ar *Studiadennoù* ha *Prezegennou*

**Da 9 eur :** Prezegenn gand an Ao. ARZUR DE DIEULEVEULT, war ar *Bleun-Brug* aboe m'eo bet savet betek vremen.

Eur ger gand an Ao. LÉGUISTIN ha gand an Ao. NESTOUR war ar *Bleun-Brug e Treger* ha war ar *Bleun-Brug e Bro-Wened*.



**An Ao. CORNIC**  
Rener-meur ar *Bleun-Brug*

Da 10 eur :

Prezegenn gand an Ao. Raymond DELAPORTE war *Breuriezh ar Brezoneg er Skoliou*.

Da 11 eur : Studiadenñ c'hallek gand an Tad BELLOT, eur manac'h eus a urz Sant Beneat hag a zo brudet e pevar c'horn ar bed kristen dre an ilizou kaer en deus savet, war *La vérité dans l'art : tu ne mentiras point*.

Da 14 eur : Studiadenñ c'hallek gand an Ao. CORVEN, eus a Gervaria, Bro-Wened, war ar *peziou-teatr brezonek*.

Da 15 eur : Studiadenñ gand an Ao. H. CAOUISSIN, war *Emgleo ar Strolladou c'hoarierien*.

Da 16 eur : An Ao. PERROT, Rener *Feiz ha Breiz*, a lavaro eur ger bennak war *Feiz ha Breiz, Feiz ha Breiz, kannad ar barrez ha Feiz ha Breiz ar Vugale*.

Da 20 eur, e sal ar Patronach : Beilhadeg brezonek ha kemraek, e testeni eus an unvaniezh striz a zotre Bro-Gembre ha Breiz-Izel.

Setu aman petra vezo kanet ha c'hoarriet :

- 1) *Cwm Rhondda* (Coum Rhondda), gwerz kemraek, gant John Evans Morris, Vincent hag Ewart Pate.
- 2) *Bleuniou a garantez*, kan, gant Job ar Guennegan, rener c'hoariva brezonek Paris.
- 3) *Salud Kembre da Vreiz*, gant John Evans Morris.
- 4) *Yn Nyfryn Clwyd* (e traonienn Clwyd), son kemraek gant J. E. Morris, Vicent hag E. Pate.
- 5) AR VAMM, pezh kentelius eus ar re gaera ha nevez flamm, c'hoarriet evid ar wech kenta gant c'hoarierien ar Bleun-Brug, renet gand an Ao. de Dieuleveult.
- 6) *Llwyn On* (Bali an Onn), kan, gant paotred yaouank Kembre.



**An Ao. Xavier de LANGLAIS**

a raio Yann Landevennec er pezh « SAV »  
a vezo diskleriet e iliz diskaret abati Sant-Gwennole,  
d'ar 4 a viz gwengolo.

(Photo tennet eus al leor, da rakprena :  
*Les Bretons d'aujourd'hui*)

- 7) EN O EIL BUGALEACH, pezh fentus, c'hoariet gant c'hoarierien ar Bleun-Brug, renet gand an Ao. de Dieuleveult.
- 8) *Sospañ Fach* (ar *gastolorenn vihan*), son kemraek fentus meurbed, kanet gant paotred yaouank Kembre.
- 9) TAVARN AR SPONTAILH, pezh nevez, eus ar re farsusa.
- 10) Da gloza : *Bro goz ma zadou.*

#### D'AN 3 A VIZ GWENGOLO :

Da 8 eur : *Oferenn ar Bleun-Brug*. Epad an oferenn-ze, ar strolladou kanerien a gano kantikou brezonek hag an Aotrou Mesguen, eskob Poitiers, a raio eur brezegenn.

**Goude an oferenn :** *Kenstrivadegou bloaveziek ar Bleun-Brug*, e sal ar Patronach : Kan, displegaded, lennadeg ha prezegerez.

Da 12 eur : *Lein en « Hôtel des Voyageurs ».*

Da 14 eur : *C'hoariadeg vras* e sal ar Patronach : Kanaouennou gand ar Strolladou o devezo kemeret perz e kenstrivadeg ar c'han.

— Diskleriet e vezo evid ar wech kenta, gant Paotred Pleiber, renet gand an A. Salou, eur pezh-c'hoari nevez savet gand an Ao. CORVEN, eus a Gervaria : *Eun Tad en devoa daou vab.*

#### D'AR MERC'HER 4 A VIZ GWENGOLO :

*E LANDEVENNEG.* — Er bloaz 935, breman ez eus 1000 vloaz, Yann, unan eus abaded brudeta Landevenneg, hag en devoa ranket tec'het a-raok an Normaned, gant relegou sant Gwennole, a c'hellas distrei d'e vanati koz hag a stagas raktal da unani e genvroiz ha da stourm ouz enebourien Breiz. Evid lida, da vat, milvet bloaz an distro laouen-se, e vezo

kanet, gant aotre an Aotrou 'n Eskob, da 10 eur hanter, etre mogerioù hanter gouezet iliz koz an Abati, *oferenn-bred* sant Gwennole, gant *Menec'h Kervenat*, evit hor Breiz-ni hag ar re holl o deus roet o buhez evit he silvidigez.

Araok an oferenn, e vezo kanet ar bedenn-man, evid ar Vretoned aet da anaon : *Languentibus in purgatorio*, savet gand eur manac'h eus a Landevennec.

Da 12 eur : *Lein en « Hôtel du Beau-Rivage ».*

Da 14 eur : *Gouel brezonek* eus ar re gaera e iliz dismantret an Abati.

- 1) *Eur ger* diwarbenn dismantr Landevennec.
- 2) *Gwerz Yann Landevennec*, gant kanerien Pleyben.
- 3) SAV, eil arvest Yann Landevennec, diskleriet gant c'hoarierien ar Bleun-Brug, renet gand an A. de Dieuleveult.
- 4) Kanaouennou kemraek ha brezonek gant kanerien eus Kembre hag eus Breiz : *Gwazed Harlec'h*, ar *Gwiniz Gwenn*, ar *Mesaer* hag all.
- 5) Da gloza, *Kantik sant Gwennole*, gant kanerien Pleyben.

Da 17 eur : Distro da Bleyben, dre Vene-Hom, Locronan ha Kastellin.





Labour " Breuriez ar Brezoneg er Skolioù "  
e-pad ar Bloavezh 1934-1935

Evel m'hon eus displeget arlene er gelaouenn-man, « Breuriez ar Brezoneg er Skolioù » a zo bet savet evit lakaat ar brezoneg da veza desket er skolioù kristen hervez kemennadurezh an Aotrou 'n Eskob, evit skoazella ar vistri hag ar mestrezed-skol en o labour, hag evit rei prizioù d'ar skolaerien ha d'ar vugale o deus labourer ar gwella war an dachenn-se.

Ar Vreuriezh ne labour nemet e kantoniou Karaez, Ar C'hastell-Nevez ha Pleiben (Eskopti Kerne); met emeur o vont da sevel breuriezhioù all hevel ouz houman e rannvroioù all Goueled Breiz.

Betek-hen ez eo aet ar Vreuriezh war raok atao. Tri bloaz 'zo abaoe m'eo bet savet hag e kresk bep bloaz; 19 skol a zo en hor rannvro : er bloavezh kenta e oa 2 skol o teski brezoneg, arlene e oa 8, hag hevlene 15, a-benn ar bloaz a zeu ne chomo hini ebet e maez ar genstrivadeg ha ne vo nikun e tro ar C'hastell-Nevez, Karaez ha Pleiben o tisenti ouz gourc'hemennou an Aotrou 'n Eskob.

Evit niver ar vugale a zo bet desket d'ezo lenn ha skriva brezoneg eo aet ken mat all an traou endro : 137 a oa er bloavezh kenta, 389 en eil ha 654 er bloaz-man, hep konta ar re n'o doa ket gallet dont d'ar skol deiz an arnodenn (ekzamin).

#### AN ARNODENN

Diou droiad hon eus ranket ober evit lakaat ar vugale da dremen an arnodenn, unan e miz mae, hag eben e miz mezeven; 15 deiz en deus padet al labour er skolioù.

Gwelloc'h brezoneg a vez skrivet gant ar vugale er bloaz-man eget arlene; hag a se n'eus nemet meuleudi d'ober d'ar vistri kouls ha d'ar vugale.

Ar re-man a oa rannet evel boaz e tri rummad; setu aman o labour evit an arnodenn :

TREDE RUMMAD (ar re vihana) :

- a) Lenn e brezoneg pennadoù aes.
- b) Respont d'eun nebeut goulennoù war ar pennad lennet hag ar vuhez pemdeziek.

EIL RUMMAD

- a) Skrivadenn aes.
- b) Lenn e brezoneg gant goulennoù.
- k) Eun dampskeud eus Istor Breiz.

KENTA RUMMAD (Rummad an testeni-studi) :

- a) Displegadenn (dre skrid).
- b) Lenn e brezoneg gant goulennoù.
- k) Istor Breiz dre vras.
- d) Jedi e brezoneg (konta, kenstrolla, diskonta, lieskementi ha ranna).

Bez' e oa 124 bugel er Rummad I<sup>a</sup>, 208 en eil, ha 321 en trede.

#### TALVOUDEGEZ AL LABOUR

##### DISPLEGADENN

Setu aman an displegadenn bet roet da vugale ar rummad kenta er bloaz-man : a) « Ho preur Yann a zo aet da soudard da Roazon. Skrivit da rei d'ezan kelou eus ar gêr da gonta d'ezan petra 'zo en em gavet d'an deiz kenta eus ar bloaz en ho ti. » — b) « Ho mamm a zo oc'h ober krampoez ; kontit d'in penaos e ra. » — k) « Tantalad sant Yann; penaos e vez graet, petra 'vez gwelet ? »

Mat e oa ar poelladennou (deverioù) peurvuia; embannet e vo ar re wella anezho e « Feiz ha Breiz ».

##### SKRIVADENN

Gwelloc'h eo bet ivez eget arlene. E skol Santez-Anna Plonevez dreist-holl e oa merc'hed bihan hag a ouie skriva brezoneg kouls lavaret hep fazi.

##### ISTOR

Ne oa ket gwall ampart ar vugale war an Istor; skol Landelo a oa ar wella war ar poent-se.

Ret e vo d'ar vistri labourat startoc'h war an dachenn-se er bloaz a zeu. Ma oa bugale hag a ouie ervat istor o bro, an hanter brasa anezo a oa dister awalc'h ar stal ganto war ar poent-se.

## LENN

Gallout a reer lavarout e oar an holl vugale lenn brezoneg, hag ar pep brasa « mat-tre ».

N'eus nemet kenderc'hel !

## JEDI

Aman ivez eo aet an traou kalz gwelloc'h eget ma sonje d'imp. Ar pep brasa eus bugale ar rummad kenta a zo gouest da gonta mat-awalc'h e brezoneg.

Ar re falla eo ar re a vez komzet galleg d'ezo er gêr : ar gerent a vefe kalz gwelloc'h d'ezo deski brezoneg mat d'o bugale eget deski d'ezo galleg fall.

## PRIZIOU

## A) PRIZIOU AR VISTRI

**Kenta priz :** Skol Santez-Anna e Plonevez ar Faou.

**Eil priz :** Skol Sant-Jozeb e Landelo (Rummad kenta).

**Trede priz :** Skol gristen Lanedern.

**Trede priz :** Skol I.-V. ar C'hraun e Speied (Rummad kenta).

**Trede priz :** Skol I.-V. ar Porzou, er C'hastell-Nevez.

(Abalamour d'ar skoazell a zo bet roet d'imp nevez 'zo gant Bretoned kalonek, e c'hallomp rei 3 trede priz er bloaz-man.)

## B) PRIZIOU AR VUGALE

a) E pep skol e vez roet prizioù d'ar re o deus bet ar gwella notennoù e pep rummad. Re hir e vefe rei ar roll anezo aman : 140 levr-priz a zo bet roet d'ezo.

b) Ouspenn-se e vez roet prizioù d'ar re o deus bet ar gwella notennoù er Rummad kenta evit an Displegadenn hag an Istor hag en eil Rummad evit ar Skrivadenn hag an Istor.

Setu aman o anioù :

RUMMAD KENTA (124 bugel) *Displegadenn*

**Kenta priz :** Mari ar Mogn, Plonevez; — Loeiza Morvan, Sant-Wazeg.

**Eil priz :** Mari an Anuhel, Plonevez.

**Trede priz :** Juliana Pasket, Speied.

**Pevare priz :** Berc'hed Allot, Landelo; — Marianna 'r Gevell, Plonevez; — Loeiza Henaff, Speied; — Mari 'n Herrou, Plonevez; — Jozefina Menteour, Landelo; — Marianna Parchemin, Speied; — Janed Riou, Lanedern.

*Istor*

**Kenta priz :** Marianna Sizun, Landelo.

**Eil priz :** Gabriela an Ni, Janoe c.

**Trede priz :** Anna Lochou, Landern. — Jozefina Menteour; — Janed Riou, Laredern.

EIL RUMMAD (208 bugel) *Skrivadenn*

**Kenta priz :** Naig Gwichouz, Plonevez.

**Eil priz :** Yann ar C'hariou, Pleiben; — Mari ar Mogn, Plonevez.

**Trede priz :** Youena Falc'hier, Plonevez; — Janed ar Granneg, Plonevez; — Mari-Jozefa 'r Gwilhou, Plonevez; — Yann Rannou, Pleiben.

**Pevare priz :** Loeiza Trévili, Plonevez; — Eliza Postig, Kore; — Franseza Moreo, Plonevez; — Aliz Tro-meur, Plonevez.

*Istor*

**Kenta priz :** Mari Hourman, Landelo.

**Eil priz :** Mari an Norman, Plonevez.

**Trede priz :** Janed ar Born, Ar C'hastell-Nevez.

## TESTENI-STUDI (1)

Ne vez ket roet an testenioù d'an holl; n'eus nemet

(1) -Roet e vo an « Testennoù-Studi » d'ar vugale epad Gouelioù ar « Bleun-Brug » e Pleiben dirak an Aotronek Eskibien, d'an 3 a viz gwengolo, goude kreisteiz.

re ar rummad kenta o deus bet notennou mat evit an holl boelladennoù a c'hall her c'haout.

38 a zo bet kavet gouest d'hor c'haout hevlene; 8 anezho o doa hen bet arlene; setu ez eus 30 marc'h vihan muioc'h er bloaz-man o deus diskouezet n'eman ket ar brezoneg o vont da vervel c'hoaz.

Setu aman o anoioù :

**Ar C'hasteil-Nevez** : Mari ar Ber (meneg mat). — Janed ar Born (meneg mat). — Marianna David. — Janed ar Suignard. — Mari Toutouz.

**Landelo** : Marianna Sizun (meneg mat). — Jozefina Mentour. — Gabriela an Ni. — Berc'hed Allot. — Anna Prad. — Marianna 'n Aloued. — Marc'harid an Taleg. — Filomena Derrien. — Marc'harid Jafre. Katel an Ozac'h.

**Lanedern** : Janed Riou (meneg mat). — Anna Lochou (meneg mat). — Simona Riou.

**Plonevez ar Faou** : Marianna 'r Gevell (meneg mat). — Anna-Mari Moreo. — Mari-Jozefa ar Paj. — Mari 'n Herrou. — Mari ar Mogn. — Anna Gwichouz. — Mari an Anuhel. — Anna Berre. — Mari-Anna ar C'here. — Franseza 'n Haridon.

**Sant-Wazeg** : Loeiza Morvan. — Marianna 'r Bronneg.

**Speied** : Janed-Mari ar Bloaz. — Mari Benjamin. — Sélestina Kochenneg. — Loeiza an Henaff. — Bernadeta al Lapous. — Mari Poupon. — Marianna Parchemin. — Marc'harid Gwionvarc'h.

Kreski a ra bep bloaz niver ar re a zo gouest da lenn ha da skriva yez o zadou koz; a-benn eun nebeut bloaveziou e vo 1500 bugel o labourat war ar brezoneg bep bloaz en hor rannvro. Ha neuze e vo deuet an holl dud da gompren ne c'hall ket eun den beza eun den desket ma na oar ket lenn ha skriva brezoneg.

Met seul vui e ya war vrasaat niver ar re o deus bet eur geennadurez vrezonek, seul vui e kresk dispignour ar Vreuriezh.

D'ar re o deus karantez evit ar brezoneg d'he harpa ha d'he skoazella dre gas d'ezhi eur gwenneg bennak. (An ar-c'hant a c'hall beza kaset dre bost-chekenn, skrivet evel-hen : « Breuriezh ar Brezoneg er Skolliou », Châteauneuf-du-Faou (Finistère); C. C. 7887 Rennes).

D'ar re holl o deus roet o skoazell d'hor Breuriezh, ha dreist-holl da rener « Brezoneg ar Vugale » trugarez en ano ar vugale hag ar vistri a labour ker start da zer-c'hel ar brezoneg en e sao.

## AR PEURZORN

**V**A Doue, ho pennoz a zo koezet war hon douarou, hag hor parkeier o deus roet o frouez d'ar mare.... Ar c'hloar n'eo ket evidomp-ni, Aotrou, met evit hoc'h hano santel.

Parkad goude parkad, karrad goude karrad, an eost a zo deuet adarre d'ar gêr. An eil warlerc'h eben, an herdin ed a zo bet plaoufet gant ginou marlonk an dournezh hag en eur ober eur skrijadenn, ar gwinih melen, diframmet diouz o fell, o deus ruilheth gant kas war al leur.

Endra ma save ar bern kolo a-us d'al liorz, ar bern greun a zo aet ive a nebeudou war gresk; hep gwech m'eo bet chomet an dournezh a-zav, an tad a familh n'en deus ket gellet miret da vont da daoler eur zell evesiant warnan.

A! n'eo ket diwar e c'har eo e vez barnet eur parkad ed, e gwirionezh, met war al leur, goude ma vez dournet. Ar bern gwinih hag hen a zo bras, ar greun hag i a zo li-vet brao ha bouedet mat? Eno eman an dalc'h.

Siouaz! distrustel a-walc'h eo en em gavet an eost en hor bro Breiz. Deuet mat peurliesha e douarou krenv an Arvor, eo bet difounn e douarou skanvoc'h an Argoad.

Promesaou kaer a oa bet koulskoude war dreujou an nevez amzer. Met setu aze, en hor micher, ne dleer morse fiziout re; alies e paker dizouezenn. Dervezioù g'leeb ha yen mae ha mezeven o deus dalc'het glas an ed epad re hir amzer, ha p'eo en em zispaket gorennou heol miz gouere, int bet skaotet ha darevet re vuan. Evelse eo bet gwelet, er bloa-man, an eost dare kalz abretoc'h e kreiz an douar bras eget war ribl ar mor.

Daoust hag eun eost treutoc'h, er vro a-bez, a lakaio marc'had an ed da vont war wellaaf? Lod hen lavar. Gant ma ne vezo ket eun digarez, evid ar c'houarnamant, da lezel an ed estren da zont d'hor peurivina !

Mard' eo bet disteroc'h an eost eget a-wechou, dre vadelez Doue ha dre c'hras an amzer vrao, eo bet koulskoude dastumet mat, klozet buan hag hep le a boan. 'Vezo ket bet izomm en eost-man da skuba alies al leuriou, na da stanka enno an toullou buzug, pegwir an ed o tont eus an dournerez a oa kraz, a strake pa vezent lakaet etre an dent hag a oa dre-ze mat dioc'h-tu da c'horreren ha da bignat er c'hignol.

Dirag an nizerez o vont en-dro, edoug an dervezioù tremenet, o welout an disparti graet ganti etre ar greun mat hag ar greun gwan, ne c'hellen ket miret da zonzal e komzer an Avel, en disparti-ze a ray Doue ive eus an dud, da fin ar bed ha zoken da eur ar maro. Sonjal a raen er pennoù ed-se, an oa gwelet ken lorc'hus, ken soun en o zav a-us d'an dachenn, ha n'o doa taolet war al leur nemet gwiniz moan ha goulo. An nizerez a zaole breman er-maez e-mesk ar pell hag al lostennachou a vezo devet er garzadcan genta a vo graet warlerc'h an eost.

Sonjal a raen ive er paourkez kenvroiz, daliet ha diempennet-se, a hade ar freuz hag ar spont en-dro d'ezo, epad m'edomp-ni a wir-wella gand an eost. Hag e lavaren ennoun va unan, a! tud evelse eo a zaver er c'hêriou : lamponed ha dispac'herien, penaos 'ta e ve kement eus hon tud yaouank hag en em lezfe da veza touellet da vont da veza en o zouez, pa gavont labour ha bara war ar maez en-dro d'o iliz parrez ?

L. B.

# AR VAMM



Skeudennet gant X. d. LANGLAIS

Ar pezh-man a vezo diskleriet, d'an 2 a viz gwengolo,  
e Bloyben.

## Ar Vamm

a zo eur pezh hag a zo bet troet e brezoneg diwar ar pezh kemraek Y Fam, gant skoazell an dimezell Meirion Dyfnallt Owen, eus a Gervarzin, e Bro Gembre.

Bennoz Doue d'ezi da veza teurvezet rei an dourn da lakât eur pezh c'hoari nevez muioc'h etre daouarn Bretoned Breiz-Izel

Feiz ha Breiz eo perc'hen al leor-man ha red eo en em glevet gantan evit gellout e c'hoari.

Serignac, d'an 22 a viz eost 1935.

Y.-V. PERROT.

### C'HOARIERIEN

YVON, an tad.

NON, e eil gwreg.

ANNAIK, e verc'h vihan.

GWENNOLE, e vab.

MARL, e wreg kenta.

ENEOUR, ar mevel.

LEC'H : Kegin ferm Ty ar Menez.

AMZER : Seiz eur d'an noz a-raok Gouel an Anaon.

## SKLERIJENN

Eur gegin en eur ferm distro e Ty ar Menez.

Koan a zo war an daol; yod ha laez er skudellou d'e zouba. War eur chichen, eur mekanik da wriat gand eur zae rus-wenn o koueza dioutan; eur fuzuilh, taolennou hag eun almanag pe zaou a weler a-ispilh ouz ar mogerioù; eur gwele bihan gand eur palleñ rus a zo harp ouz moger an tu dehou e kichen ar gou-lou; eun nor da vont er maez eus an ti a zo e kreiz moger traon al leurenn; en tu dehou d'an nor-se ema an tan hag en tu kleiz eur prenestr gand eur blan-tenn ennan.

E tu kleiz al leurenn ez eus eun deleziou da bignat d'an nec'h hag eur skaon; podou bet o lakât laez a zo taolet heb urz ouz ar skaon-se.

An tu dehou hag an tu kleiz eo tu dehou ha tu kleiz ar c'hoarier, na petra 'ta, ha nann ar seller.

Seiz eur eo; e pardaez gouel an Holl Zent emañ; Non a zo en he sav; eur plac'h koantik a-walc'h eo nemet ne oar ket en em wiska; doare he deus gand an dra-ze da veza mouzet; Eneour, an derveziour, eur paotr aet war an oad, a zo o wiska e zilh da vont d'ar gêr; Yvon a zo ouz an daol hag a zell ouz Non gant teneuredigez.

A-raok ma sav al lien e klever ton gwerz an Anaon :

Breudeur, kerent ha mignoned,  
En han' Doue hor selaouet !

# AR VAMM

Pez C'hoari en eun Arvest

gant

Betty Eynon Davies

ha

Kate Roberts



YVON (*da Eneour*). — Mont a reoc'h d'ar foar warc'hoaz, Eneour ?

ENEOUR. — Nann ; ne gredan ket ; va amzer mont d'ar foariou-me a zo tremenet ; ar foariou n'int mui ar pezh ma oant em yaouankiz ; breman ne weler enno ken nemet kezeg koat ha me oar me petra o trei ha merc'hed yaouank skanv-benn' o pignat warno da youc'hal, ma vez eun druez o c'hlevet. Em amzer-me e oa merc'hed yaouank ivez hag a 'z ae d'ar foariou hag e talveze ar boan mont keit hag ac'han da Gemper evid o gwelet ! A ! sator dalik, setu aze neuze merc'hed hag a oa drant ha seder gant o dilhad kernevat !

O ! n'eus ket a verc'hed evelse ken !

NON (*oc'h heja he fenn*). — Ya ! C'houi a lavar-se, Eneour !

ENEOUR (*evel ma vije oc'h hunvreal*). — Me wel ac'han, ker sklêr ha ma vije bet dec'h, merc'hed Mi-

lin Roz-Lann o tont da foar Bleyben, gand o broziou seiz du hag o c'hoefou dantelezet ; n'eus ket a zilhad hanter ker kaer ken breman ha ma oa neuze : breman emaint holl o klask lezel o c'hoefou ouz an drez evit kaout eun digarez vat da vont e tok !

NON (*o trei he fenn*).

ENEOUR. — Merc'hed koant e oa ar merc'hed-se hag o feder e vezent atao gwisket henvel ; Anna a zimezas hag a yeas d'an Amerik ; Jann, me gred eo bet da dad, o klask he c'haout, Yvon ; Fant, a gav d'in, he deus bet eun dizouezenn, p'eo bet dimezet gand eur paotr diboell eus a Vrest, ha Mari, ar paourkêz Mari, ar gaera anezo holl, a zo maro, dre uz, d'he naontek vloaz ; ar vedesined n'o deus gouezet netra ebet biskoaz diwarbenn he c'hlenved !

NON. — O ! te a zo eur randonenn ha ne vez hano ganez atao nemet diwarbenn Mari Milin Roz-Lann. Me a gave d'in e oa dleet d'it beza hen ankounac'haet, evelato, zbenn breman, keit all a zo m'eo maro !

ENEOUR (*têr*). — Na me, na c'houi, na den eus ar re o deus he anavezet ne c'hell he ankounac'hât ; roet ho pije an hanter eus ho tanvez evit kaout ar bleo melen-aour he devoa war he fenn. Mari Milin Roz-Lann n'he devoa ket a ezomm da lakât poult rus war he diweuz evit chacha warni sellou ar baotred !

YVON. — Selaouit eur pennad ganen, Eneour ; red eo d'eoc'h anzao ez eus merc'hed kaer breman ivez ; roz gwenn nevez a zigor bep bloavez !

ENEOUR. — Ar roz gwenn breman n'int ket ker brao hag ar roz gwenn a weled pa oan me paotr yaouank ; ne oa rozenn ebet bravoc'h eget Mari milin Roz-Lann p'oa beo. (*Huanadi a ra*). Ha n'eo ket aman eo e vijen bet, er pardaez-man, ma vije bet chomet war an douar !

NON. — O ! en eul lec'h all, falloc'h eget henman c'hoaz, e c'helljec'h beza bet ha marteze Mari Milin Roz-Lann he divije bet drein hag o divije piket koulz ha re ar roz all.

ENEOUR (*têr*). — Grik ebet diwarbenn an hini varo.

YVON (*eun tamm droug ennan dre m'en deus Eneour respontet kalet e wreg*). — Marteze e vije gwelloc'h d'eoc'h rei o c'hoan breman d'ar chatal hag e tistrooc'h d'ar gêr dioc'htu goudeze.

NON (*a zav hag a gas podou al laez da gamp al laez*). — O ! al labour kasäus-man ! N'eus fin ebet da zervez eur vaouez diwar ar maez. (*Kregi a ra eno d'o c'has kuit*). Er pardaez-man c'hoaz n'int ket re zies da walc'hi. (*Mont a ra er maez dre an nor ; Eneour a zav ivez da vont en hentchou*).

YVON. — Ne vezo ket red d'eoc'h distrei war-c'hoaz m'ho peus c'hoant da vont d'ar foar ; al labouriou a zo da ober c'hoaz a c'hell gortoz ; me, m'oar vat, a 'z ay betek ar Roc'h C'hlas da welet penaoz ez a an dro gand an denved a zo eno.

ENEOUR. — Nann, warc'hoaz e tizroin, evel en deiziou all, daoust ma 'z eo ar wech kenta d'in, abaoe hanter kant vloaz, da jom hep mont da foar Bleyben. Kals traou a dreuz va spered, er pardaez-man, Yvon ! N'ouzes ket emamp e pardaez gouel an Holl Zent ?

YVON. — Ya ! hag ema deuet noz an Anaon.

ENEOUR. — Te ez peus kollet unan hag a garies kals, bloaz a zo, er pardaez-man ha me a gollas unan hag a garien kement all daou ugent vloaz a vezo ivez er pardaez-man ha daoust ma 'z eus daou ugent vloaz abaoe, n'oun ket evit he ankounac'hât, Yvon.

YVON (*gant mez ha nerz*). — Ya ! met n'oa ket henvel an traou ganeomp hon daou ; te a oa disher ha me a ranke kaout unan bennak da ziuall va bugale !

ENEOUR. — A ! sell 'ta. Ya ! hag e pelec'h emaint d'an eur-man 'noz ?

YVON (*nec'het*). — M'oarvat int aet da ober eur gefridi.

ENEOUR. — Da ober eur gefridi, d'an eur-man, dre eun noz ken tenval ! Va Doue ! n'oun ket evit kredi eo evit kaout unan da ziuall da vugale eo ez out aet da zimezi gant hounnez ! Ne oar ket an doare d'o sevel ; gwella ma 'z eo eo da eva flip en ostaleriou hag ar vrud he deus n'eo ket kaer ; ne 'z peus klevet netra diwar he fenn ?

YVON (*droug ennan*). — Tavit ; arabad eo morse komz evelse, diwarbenn va gwreg, em zi.

ENEOUR. — O ! me a anavez an ti-man en da raok te, Yvon ; me a zo bet aman gant da dad ha da dad koz ha biskoaz, epad an daou ugent vloaz, m'oun bet en o serr n'em eus klevet ganto ger ebet ken dichek hag an hini emaut o paouez lavaret d'in ; aman e oa eur blijadur beva ken eo deuet hounnez, breman ez eus c'houec'h miz, da gemeret lec'h eur vaouez ker karantezus ha Mari. Evidoun-me n'em eus anavezet maouez ebet koulz hag hi war an douar-man ; an ti aman a veze atao ken dibikous an traou ennan ma oa eur blijadur dont ebarz hag ar vugale vihan a veze ker koant ar saeou a rae he-unan evito, evit mont d'ar skol ha d'an oferenn, ma oa eun dudi o gwelet ; m'her gwel breman, c'hoaz, o teurel evez, diwar dreujou an nor, aze, war he bugale keit ha ma c'helle o gwelet o pignat du-hont gant gwenodenn ar Run. A ! n'eo ket hounnez eo he divije lezet podezou al laez hep o gwalc'hi, betek an eur-ma 'n noz !

(*Ar geriou diweza-man a lavar en eur vont er maez ; Yvon a jom en e zav, e benn soublet, e zaouarn en e c'hodell hag e gein troet warzu an nor*).

YVON (*Sellet du a ra ouz Eneour hag e c'hervel a ra*). — Gwell eo d'eoc'h kemeret al letarn, Eneour.

ken tenvall all ma 'z eo an noz ; anez n'en em gavo'c'h biken e Krugherrou, hoc'h-unan !

ENEOUR (*o respont eus ar maez*). — Mat ! m'her c'hemero er c'hraou zaout, bremaik ! (*Pellât a ra*).

NON (*o tizrei d'an ti*). — Aet eo en hent, pello'c'h ar c'hoz brabanser koz-se gand e Vari Milin Roz-Lann hag e Vari Milin Roz-Lann hag hen ?

YVON. — E pelec'h ma ar vugale, Non ?

NON (*o renka an traou*). — Aet int da gere'hat bara d'ar vourc'h ; ne oa ket eun ta' an ken en ti ha nem oa bet tamm amzer ebet da ober va foza-denn dec'h da noz.

YVON. — Hag emaint oc'h ober eun hent keit-se d'an eur-ma 'n noz ! ar vugale geiz ! Mont a rankan d'o diambroug ; marteze o devezo aoun o tremen ebioù ar vered ha gouest a-walc'h int ivez d'en em goll o treuzi ar yeun.

NON. — O ! n'it ket da gaout kement-se a nec'h hag a breder gand ar re-se ! Mall eo d'ezo gouzout en em jacha o-unan !

YVON (*rok, a gemer e vantell*).

NON (*o vont warzu ennan a gemer e zourn hag a zell outan a-ban, evid ober d'ezan chom er gêr*). — Chomit aman, paotr paour, ha n'it ket d'am lezel va-unan penn, ken distro all ha ma 'z eo al lec'h-man !

(*Yvon nec'het, eur pennad, a dro kein d'e wreg hag a gerz etrezek an nor*). Petra ? muioc'h e karit ar vugale-se 'ta egedoun-me ? (*Her chacha a ra war adre hag e ra d'ezan azeza war eur gador*). N'oc'h ket fur a-walc'h o vont en hent d'an eur-man ; skuiz a-walc'h e tleit beza, kouls ha va unan, goude beza bet en oferenn-bred hag er gousperou ! Azezit aze ha grit eur c'horniad butun.

(*Non a ro d'ezan e gorn hag e vutun ; ober a ra e gorniad hag e laka tan warnan ; hi a gendalc'h da*

*lemmel an traou diwar an daol. Yvon a jach war e gorn hag a dro e benn pa wel eo goulo an daol*).

YVON. — Daoust ha ne lezoc'h netra ebet da zibri gand ar vugale ?

NON. — Nann ! Nann ! Ma ne c'hellont ket en em gaout abred a-walc'h e chomint hep debri.

YVON. — Red eo derc'hel eun dra bennak d'ezo, Non ; ar vugale pa vezont oc'h ober o c'hresk o deus ezomm debri. Ha neuze, ker blank all ha ma 'z int, piou a oar ha ne gouezint ket en hent goude be-grêt kement-all a vale ?

NON. — N'eus ket a ezomm d'o c'hlemm, bara a zo ganto. (*Non a ya warzu he c'hador hag e krib he bleo. Yvon a jach war e gorniad hag a zell ouz an tan*).

YVON. — Daoust ha gwale'het eo bet ar podezou da lakât laez a-benn warc'hoaz ?

NON (*dichek*). — N'int ket, avat ; n'em eus ket bet amzer. (*Ehana a ra da gribat he bleo hag e chom a-zav dirazan*).

Petra c'hoarvez ganeoc'h, fenez, Yvon ? Biskoaz n'em eus ho klevet c'hoaz oc'h ober eun hevelep gou-lenn !

YVON. — O ! netra ! Eneour en deus laket eun tamm droug ennoun hizio ; n'eus nemed an dra-ze !

NON. — Henez ar paotr koz-se n'eo nemed eun torpenn. Evidoun-me a zo skuiz o klevet e zorc'hennou ; atao e vez gand amzer e yaouankiz hag hen ; ma res diouzin-me ne vezo ket lavaret d'ezan dont ken ; en eun doare bennak e raimp hepdan ; ne c'hounit ket ar bara a zebr.

YVON. — A ! nann ! n'oun ket evid ober an dra-ze ; aman e oa a-raok m'oun me bet ganet ; gant va zad e oa aman hag a-raokoc'h gand va zad koz her c'hare kenan : brud fall em bije, m'hel lezfen da vale.

(*Da gendere'hel*).



## Dalc'homp d'hor gwiskamant

**B**REMAN ez eus eun ugent pe dregont vloaz, ar c'homzou-man o defe laket ar mouse'hoarz war muzellou meur a hini, met breman, daoust hag an hevelep komzou ne rafent ket an hevelep tra ?

Eo, a dra zur, met en eun doare dishenvel, Nag a gemm etre an amzer hirio hag an amzer goz. Gwechall, pa weled eur baotrez blansonet he bleo ha kloumet gand eur zeizenn a liou, nag e vije kaer da welet; breman, siouaz, ar sizailh pe an douzerez o deus graet o labour; ne weler mui, kouls lavaret nemet bleo trouc'het; eul lodenn eus gened Breiz a zo trouc'het d'o heul.

Hag ar merc'hed yaouank, p'o gwelan, — hiniennou hepken c'hoaz, dre c'hras Doue, — gant o bleo trouc'het, warno eun tamm tok, alies ouz kostez ar penn, n'hellan ket mirout da lavaret : « Evit plijout da biou eo kement-man ? Evit plijout d'eur c'houer yaouank, garo ha kalet e zaouarn, gand al labour ? Nann ! Evit piou 'ta, neuze ?

N'hellan ket respont; int-i a en em gargo; n'eo ket eul chom war ar maez eo o deus nac'het gwiskamant o mamm, evel ma lavare ar re goz a zo gwir :

*Merc'h a nac'h gwiskamant he mamm  
D'ar Feiz abred a roio lamm !*

Mar goulennit digand ar merc'hed a zo aet e tok, perak o deus troket o dilhad, e respontint : « Evit heulia ar c'hiz ! evit beza henvel ouz kêriz ! »

Na sota tra ! klask beza henvel ouz tud hag a zo o buhez ken dishenvel diouz hon hini; ar pez a ra enor Breiz eo beza dishenvel diouz ar poblou all, dre he gwiskamanchou, he yez, hag he feiz.

An traou-se holl a zo traou presius, traou hag a zo pec'hed o lezel da vont da goll.

Ma 'z eus kement a baourentez, en deiz a hizio e meur a diegez e Breiz-Izel, c'hoant diskiant ar merc'hed da heulia giziou Paris eo a zo marteze brasa penn-abeg ar baourentez-se.

Dilhad giz Pariz, dilhad distrantel, dilhad diwar zav, ha ne badont ket eun holl vad.

Tra souezus, ar parrezioù pella deus kêr eo a zo bet da genta o tigas ar gizioù divalo-se en hon touez.

Perak klask beza gwisket henvel ouz tud ha n'o deus nag an hevelep spered nag an hevelep labour ganeomp ?

Na pegen dishenvel eo diouz ar plac'h yaouank aet e tok, an hini a zo o tougen ar banniel da zeiz ar pardon, gant he bleo renket flour, dindan he c'hoef gwenn, he zal dizolo, warnan liou ar glanded, he diou chod, rus evel diou gerezenn, war he muzellou eur mouse'hoarz lirin, he c'horf gwisket gant gwiskamant he mamm, da lavaret eo gant he chal skubellek hag he zavancher sklêr : Houman a raio enor d'he farrez ha d'he bro, e lec'h eben !....

Plac'h yaouank diwar ar maez, labourerez an douar, pe te a zo chikolodenn, pe sparleann, pe boch-kere'h, pe choukenn, pe me oar-me, na drok morse da zilhad kaer a Vreizadez ouz dilhad iskis kêriz ! Dalc'h d'an tenzor-se ivez lezet ganez gant hon tud koz. Karomp ha dougomp hor c'hoef gwenn.

Ma kendalc'h ar c'hoefou da vont d'an traon, an hini en deus kuitaet e vro evit skigna ar feiz pe evit gounit e vara, pa zistroio goude eun nebeud bloaveziou, ha pa welo war bennou merc'hed Breiz tokou e lec'h koefou, n'en em anavezo ket ken ; anzav a ranko : « Em farrez emañ, koulskoude, met krog eo enni kienved an di-c'hiza ha d'e heul, hini an divrezonekaat ! Siouaz ! Siouaz ! »

Ha ranna ray e galon o welet eun daolenn ken mantrus ! Ni, da vihana, hag a wel an droug, stourmomp outan, e pep doare, ha mui ma c'hellomp, dre gomz ha dre ober.

MERC'H SANT SANE.

## KELEIER AR MIZ

### AR BREZONEG ER SKOLIOU

An Aotrou Duparc, eskob Kemper ha Leon, a zo o paouez rei urz da voula, war eun daolenn, a jomo speget, a-wel d'an holl, e holl skoliou kristen e eskopti, ar gourc'hemennou savet gantan diwar-benn deski Istor Breiz ha ienn ha skriva ar brezoneg d'ar vugale o darempred.

Mez eo gwelet bugale, e Breiz-Izel, ken dizesk ma ne ouezont ket zoken yez o bro; eun hevelep tra ne c'hell ket beza gouzanvet pelloc'h.

Kerent kristen, en deiziou a zeu, kasit ho pugale da skoliou hag o lakay da gerzet war an hentchou splan, santel hag enorus bet pleustret gant ho tud koz.

### E BRO WENED

E Bro-Wened, « Dihunamb », — « Feiz ha Breiz » ar vro-se, — a labour start evit harpa ar brezoneg; ouspenn ma ro priziou d'ar vugale a zesk ar brezoneg, e ro ivez eur priz a 500 lur, bep bloaz, d'ar mestr pe d'ar vestrezskol, a labouras ar gwella, edoug ar bloaz, evid ar brezoneg.

Ar priz a 500 lur a zo aet, er bloaz-man gand an Dimezell Jegouzo, renerez skol Santez-Helena, Bubry.

Meuleudi d'ar skol se, ha d'an Aotrou Trehiou a harp kement ar brezoneg hag en deus skrivet diwar e benn ar c'homzou brezonek-man :

*Bugale, deskit brezoneg; deskit hen en ho ti, gant ho tad hag ho mamm. N'hen dilezit ket er skol. Deskit ha kanit gwerzennou ha kanaouennou savet e brezoneg. Ouspenn, ma teskit her skriva, c'houi a rento d'hor yez karet, eun enor dleet mat d'ez.*

HIPPOLYTE TRÉHIOU,

Eskob Gwened.

### EUN TAD EN DEVOA DAOU VAB

Ar pezh-c'hoari nevez-se, savet gand an Aotrou Corven, eus a Gervaria, unan eus sperejou kaera Breiz, a vezo diskleriet e Bleun-Brug Pleyben, d'an 3 a viz gwengolo.

Setu aman ar varnedigez a zouge warnan, an Aotrou Buleon, person iliz-veur Gwened, maro warlene, en eul lizer a skriva d'ar 7 a viz gouere 1922, da Rener « Feiz ha Breiz » :

*« A propos de vos représentations théâtrales, il y a une petite pièce en trois petits actes qui est de nature à faire plaisir et à faire du bien : elle est de M. Corven; c'est une thèse sur l'éducation : « la manière forte où la manière faible ». Le thème est la parabole de l'Enfant prodigue, moins de poésie et de mise en scène que dans « Mouez ar Goad », mais plus d'action dramatique et plus d'idées. »*

It da welet Pôtrez Pleiber-Krist o c'hoari ar pezh nevez-se e Pleiben.

### DALC'HOMP ATAO

Bretoned an Havr-nevez o deus c'igaset d'eomp ar gartenn-man :

*Pell diouz bro o c'havell,*

*Bugale vat Breiz-Izel*

*a zalc'h d'ar gizioù fur*

*« Feiz ha Breiz » eo o stur !*

François LE NOAN, H. GOURMELON, I. LE GOFF,  
P.-M. LEC'HVIEN, person, deiz pardon ar  
Vretoned divroet e Sanvic, an Havr, 4 a  
viz eost 1935.

Meulodi d'ar Vretoned divroet-se hag a zalc'h start atao d'ar groaz ha d'ar banniel erminiget, daoust pegeit bennak emaint o chom diouz Breiz.

Ra deñs an holl Vretoned da heulia o skouer ha ra glevint, dreist-holl gant deizioù ar Bleun-Brug a zeu o tregerni e pevar c'horn ar bed, ar youc'hadenn a zav heh ehan eus bezioù hon tud koz :

*Ra jomo peb unan breizad,  
Dre holl, bepred, betek mervel !*

#### AR « C'HROAZIOU-TAN » HA BREIZ

E reolenn ar C'hroaziu-tan », e lennomp ar pennad-man :

*« La nation française forme un tout indivisible. Les antagonismes de races n'ont point cours sur son sol aimable. NULLE REVENDICATION MINORITAIRE NE SAURAIT S'ÉLEVER PARMI SES ENFANTS. Ses frontières géographiques englobent des populations de PROVENANCE ÉTRANGÈRE qui, oubliant leurs origines ethniques et linguistiques, ont su souffrir pour elle, languir pour elle, se fondre en elle. Les tentatives autonomistes qui prétendent s'y faire jour ne sont jamais que des manifestations infimes, naïses, ou des menées révolutionnaires contre la civilisation..... »*

N'eus ket eur Breizad hag a c'helle mont da heul tud hag a vres evelse gwirioù sakra ar poblou bihan.

A drugarez Doue, an holl e Frans ne gomzont ket evelse ha war al « Lectures pour tous » miz gouere diweza, en eur pennad-skrid, diwar La T. S. F. Voix des Provinces françaises, an Ao. Armand Praviel a lavar :

*« Je ne sais dans quelle société savante de département, il y a un siècle, on prononçait un discours sur ce thème : « Les lettres ne valent que dans la mesure où elles se détachent de leurs caractères spécifiquement provinciaux ».*

*Aujourd'hui, la proposition semble complètement retournée. »*

Ya! nevezentioù a zo e Frans ha gwellaennoù ivez, a drugarez Doue, ha n'eo ket re abred; labour fall Dispac'h 1793 a zispenner tamm ha tamm ha « Credo », kanad bras Unvaniezh Katolik Frans, a harp da vat goulennou ar Vretoned.

Etre ar re a glask gwaska hag ar re a glask harpa, ar Vretoned a ouezo ober o dibab ha da heul piou bale.

#### RETREJOU SOUDARDED HA MARTOLODED

A-raok mont da zoudarded, e miz here a zeu, paotred yaouank, it da ober o retred.

Retred ar zoudarded a zigoro :

- e Kemper, d'an 23 a viz gwengolo;
- e Lesneven, d'an deiz kenta viz here;
- e Salet-Montroulez, d'ar 7 a viz here.

Kerent kristen grit d'ho pugale mont da unan pe unan eus ar retrejou-se : o diouallet ho peus betek hen diouz pep droug; er retred e vezo desket d'ezo en em ziuall o-unan, d'o zro.

Hag ezomñ o deus d'her gouzout kement all a Vretoned a weler oc'h en em goll bep bloaz er c'hazarnioù hag o kemeret enno plegou fall ha ne vezint ket evid en em zizo-ber anezo ar rest eus o buhez.





## Divinadennoù Eost ha Gwengolo



1. — Yññ'h hññ n'ño kññ ðññ a ðññ  
Rññ n'ñz eo aññ vñññc'h aññ ðñññ.

2. — Diññz ðññ ðñññe ðññ ne vññññ  
Eññ ðññ mññ, mññ ðññ ðñññññ.

(Degaset gant Louisa Salaün, an Trehou).

3. — Gñññ eipññññs hññ ðñññ yññ  
E ðññ mñññññ mññññ a ðññ.

(Degaset gant M. Cabon, Gwiseny).

4. — Nñz deiz e vezan o redek bro,  
Heb beza gwelet ha koulskoude n'oun ket maro;  
Met klevet mat, ne lavaran ket,  
Alies oc'h ober trouz evel pa vefen follet.

PIOU OUN ?

(Degaset gant Tanguy Creignou, Kleder).

**RAKPRENIT :**

## LES BRETONS D'AUJOURD'HUI

par RONAN CAOUISSIN

Préface de Marcel Guieysse

4 skoued evid ar rakprenerien



Kavet e vezo el leor-man pennadoù ha poltrejou war :

TALDIR-JAFFRENNOU, CAMILLE LE MERCIER D'ERM, RÉGIS DE L'ESTOURBEILLON, Y.-V. PERROT, LOEIZ HERRIEU, F.-M. MADEC, EUJEN REGNIER, JEAN CHOLEAU, P. MOCAER, PAUL LADMIRAULT, FANSH GOURVIL, LOUIS BEAUFRÈRE, J. SKLISON (Paotr Juluan), LÉON LE BERRE, JAMES BOUILLE, EVNIG-PENN-AR-C'HOAD, X. DE LANGLAIS, F. DEBEAUVAIS, J.-Ch. LE BOZEC, H. AR MENN, YANN FOUÉRÉ, HERRI CAOUISSIN et YANN SOHIER.

Ronan Caouissin a lavar d'eomp penaos ha perak ec'h en em stagas ar Vretoned-se da labourat evit Breiz hag ar brezoneg.

— 23 poltred a vezo kavet el leor-se —

**TAOLIT EVEZ MAT :** D'ar re a gaso o hano, — hep arc'hant, — araoù deizioù kenta miz here a zeu, e vezo roet d'ezo eur skeudenn gaer grêt gant Xavier de Langlais.

Skriva da : Ronan Caouissin, « Gwasg Mad », Pleiber-Christ (Finistère).

Ma fell d'eoc'h deski ar brezoneg  
 heuilhit skoliou dre lizer « OBER »  
 Skriva d'an d<sup>e</sup> M GOURLAOUEN  
 30, Rue de la Corderie, DOUARNENEZ



Eul levr nevez brezonek  
 Evid ar Vretoned vihan

### LANIG ha BISIG

50 skeudenn eus ar re goanta a gaver el leorig-se...

Her prenit raktal d'eur bugel m'ho peus c'hoant ober plijadur d'ezan : n'eo nemed 8 real.

(Dre ar post : 2 fr. 25).

Her goulennit e ti Ronan CAOUISSIN, Pleiber-Christ (Finistère). — C./C. Mme Vve Caouissin, 22.092 Rennes.

## BRETONED, evit gwin Champagn

### Gwin Champagn, W. SANDERS, Reims

eo gwella ha marc'hamata gwin Champagn a oufec'h kaout da brena er vro-man.

Evit kloza al leinou bras hag evit krenfaat ar re glanv, n'eus gwin ebet gwelloc'h egetan !

E brizioù a zo diskennet kals izeloc'h c'hoaz eget ne oant er bloaz 1934.

Goulennit ar prizioù ouz an

Ao. **RONAN CAOUISSIN**,  
 Représentant à **PLEIBER-CHRIST**.

## Klenved ar c'henou hag an dent

**L. LAPIQUONNE** SUCCESSEUR DE  
**L. JEZÉQUEL**

Tenner dent  
 Loreet gant skol-vedesinerez Paris

A denn an dent hep poan hag a laka dent nevez, war aour  
 ha war gaoutchouk, hervez ar skoueriou diveza  
 Gwarantisa a ra e labour

RESEO A RA :

Bep Lun, e **LESNEVEN**. Hôtel Le Roux, ha bep Samedig, e  
**BRASPARTS** hag er **FAOU**. — Ar c'habinet a gonsultationoù a zo  
 digor e Brest, 4, passage Saint Martin, abou e ur beteg kreisteiz, ha da  
 2 eur betek 6 eur. Téléphone 0-16



## Yec'hed ar Vugale

Ar "Sirop FERET"

a-eneb an Doken

Graet gant louzaouennou hag a gaver er mor, ar sirop-man a ro nerz hag a yac'ha ar gwad. Ouspenn m'en deus eur vlaz eus ar re wella, louzou all ebet ne ro kement a nerz d'ar vugale hag hen.

« Ramplasi a c'hell ervat an emulsionou, an eol-moru, ar sirop Portal, ar sirop Raifort iodé, hag all... » Ar vertuz en deus da yac'haat ar gwad, ouspenn ar vertuz da zigas an nerz d'an izili, a zo penn-abeg mæ n'her roer morse en aner d'ar vugale taget gant an doken, an trousklennou leaz, ar werbl, an doureier fall, droug-ar-roue, hag ar zempladurez a deu war-lerc'h ar ruzel hag an dreo, etc.

En vente dans toutes les pharmacies.

Dépôt principal : **GRANDE PHARMACIE DU PROGRES**,  
 2, rue de Paris (au-dessus de l'Octroi), BREST.

--- "Ne c'hellan ket lenn ken !..."



oent eo d'in  
mont da di  
**POITEL**

Ar gwella  
marc'hadour

lunedou a zo e  
**MONTRouLEZ!..**

Eno

e kaver :

**LUNEDOU**

a bep seurt

evit an holl !..

Hag eur Benveg eus ar re wella.

Evit ar re vouzar : Ar Sonotonor.

**PHOTOS** -- Appareils, Plaques, Pellicules (de toutes marques)

**Ti POITEL :: Ti glas :: Ti a lizians**

War Blasen **THIERS**  
**MONTRouLEZ**


◆ Eno e vezo graet d'eoc'h ar gwella digemer ◆



le sac de 250 gr.

**5.85**

avec un Bon-Prime



**Ti koz L'OLLIEROU**

**L'HOSTIS & JORDE, Successeurs**

18, 27, rue Louis-Pasteur, 18, 27. — BREST

... Pa ho pezo eun dra bennak da breana, dalc'hit sonj eo en HON TI e kavoc'h ato ar muia da joaz hag an dessiniou nevesa e mouchoerou ha tavancherou brodet.

**SEIZ, MEZER, HA DANVEZ A BEP SEURT**

Dioc'h ar galite an ti-man a werz gwelloc'h-marc'had eget neus forz pehini all.

Eun eskompt a UGENT REAL DRE GANT a vez roët e marc'hadourez, ha DEK DRE GANT d'ar familhou niverus diwar diskouez o c'hartenn.



GWEN DAVES

## TAVARN AR SPONTAILH

*pez eus ar re fentusa a vezo diskleriet evid ar wech kenta e Pleyben d'an 2 a viz gwengolo 1935.*

MOULADURIOU AN ARVOR. — GWENGAMP  
Ar Mérour : H. CAOUISSIN, Scrignac.